



**HAL**  
open science

## ENINTYN, CRUTHIN, FER BENN, FINN

Gilles Boucherit, Ronan Le Coadic

► **To cite this version:**

Gilles Boucherit, Ronan Le Coadic. ENINTYN, CRUTHIN, FER BENN, FINN. Ronan Le Coadic. Francis Favereau: Mélanges en hommage au passeur de mémoire / Pennadoù dibabet en enor da Frañsez Favereau / A festschrift in honour of Professor Favereau, Skol Vreizh, pp.95-113, 2018, 978-2-367-58-074-6. hal-01900877

**HAL Id: hal-01900877**

**<https://univ-rennes2.hal.science/hal-01900877>**

Submitted on 2 Apr 2019

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.

Copyright

## ENINTYN, CRUTHIN, FER BENN, FINN

### Digoradur

Evel ma tisplegan ma unan e derou al labour enklask am boa savet e stumm un dezenn dindan renerezh Francis Favereau, on « deuet da gregiñ en danvez studi-mañ dre zegouezh peogwir edon e soñj ober war-dro tem an Den Gouez da zigentañ. En ur bleustriñ "Gwerz Skolan", pennad brudet Donatien Laurent e-touez studierien Kevrenn Geltiek Roazhon 2, on bet hentet dre hir-ober da bleustriñ un oberenn hollvrudet all, un tenergan Iwerzhoneg eus an daouzekvet kantved, anvet "Buile Suibhne". Dre forzh studial, n'em eus ket gallet herzel ouzhin da lenn ar poz seizh hag hanter-kant rannbennad daou-ugent m'eo chomet a-sav ma spered war ar werzenn-mañ: "*A mathair na groidhi-si*" troet gant James George O'Keefe (1865-1937) evel-hen: « O mother of this herd ».<sup>1</sup>

Ne oan ket engortoz kejañ gant ar pezh a anvan un azeul karv e-kerz an tenergan, a zo eus an trizekvet kantved G.K. a vije gwell skrivañ hiziv : lakaat an 12vet kantved en titl evel prantad amzer da Buile Suibhne evel ma vez lakaet ordin, n'eo ket gwir penn-da-benn peogwir e-giz ma skriv an embanner e-unan, an tenergan a c'hell bezañ bet savet nep koulz etre 1200 ha 1500. Din da c'houzout, 1200 a zo derou an trizekvet kantved.

Goude sellet ouzh an arouezioù marzhoniell a gaver en destenn, e tizoloimp ez eus lod a zo tost a-walc'h ouzh re marzhoniezh an Evenked, daoust d'an hed ha d'an amzer a zo etre an daou sevenadur. Komz a raimp eus divroadur Afanasievo ha eus sevenadur Andronovo, menel a raimp a sav un herradig ouzh o studial en abeg d'an daou zarvoud bezañ perzh e dont war wel an arouezioù marzhoniell lavaret en Europa. Poentoù boutin a vo kavet ivez etre marzhoniezh an Evenked ha kelc'h al Leinster dre ma vezo empleget ennañ *bláthnat*, ur vaouez heizez a roio buhez da Oisín mab Finn. Komzet e vo pelloc'h eus ar C'hruthin ha neuze eus ar bPretani diouzh ur sav-poent nevez, hini ar c'heltieg o tont eus ar c'hornog. Ar sav-boent nevez-se a eilger goulennoù a harpe ouzh hor studiadenne da vont war-raok, da lavaret eo kudenn an amzerañ dreist-holl met ivez hini donedigezh an dud war aodoù an Inizi Keltiek d'ar mare-se ha dougen ganto en o speredoù un azeul karv.

### Buile Suibhne

Da gentañ-holl eo gwell gouzout eus petra emamp o vont da gomz: an tenergan anvet Buile Suibhne a zo diwar-benn Suibne roue an Dál nAraidhe, a zo bet milliget gant sant Ronan da gentañ evit bezañ nac'het dezhañ sevel un iliz war e zouarò.

Keloù brezel a vo diouzhtu war lerc'h etre 'Domnall son of Aodh, and Domnall Brecc a zo Congal Claon mab Scannlan ha Suibne roue an Dál nAraidhe, kevredidi dezhañ. Suibne a lazho unan eus psalmourien Ronan a glaske degas peoc'h etre an daou lu.

Treñ a ra Suibne da foll gant ar braouac'hus m'eo an trouz e derou emgann Mag Rath, ha nijal kuit eus an dachenn evel ul labous. Kantren a ra dre ar c'hoadoù ha c'hoarvezout a ra dezhañ avañturioù a bep seurt gant tud eus e veuriad a glask lakaat an dorn warnañ. Met tec'hout kuit a ra atav ha bevañ en diene brasañ en abeg da milligoù ar sant. A-benn ar fin, Noblañs Dál nAraidhe a deu a-benn da dapout an den foll. Stagetao eo ken na vo deuet e skiant vat dezhañ. D'ar mare-se e vo lezet

---

<sup>1</sup> A mamm ar bagad-se!

dieub en e gambr gant ur vaouez kozh<sup>2</sup> evit e evezhiañ hep na vije aotreet da gomz dezhañ. Evelato, goulenn a ra gant Suibne diskouez dezhi penaos e lamme ha mont d'e heul. Setu en em gavont e Glenn na nEachtach e Fiodh Gaibhle, pa glev Suibne ur c'harv o vlej. D'an ampoent e lavar ur son: rannbennad 40 an hini eo. Goude-se e lamm eus tornaod Dun Sobairce en Ulster o klask an distag diouzh ar vaouez en em lazh er mor en ur glask lammat d'e heul. Goude avanturioù c'hoazh, ez a Suibne da Teach Moling, sant bras al Leinster, a zisklaer da Suibhne emañ o vont da echuiñ e vuhez amañ. C'hoar Mongan mêsaer-moc'h Moling, a ro da grediñ d'e vreur ez a e wreg da welout ur gwaz all. An oaz-kren a gemer hennezh outi ha gant un taol goaf en e vruched e torr e gein da Suibne - pe e vefe hemañ kouezhet war bik korn ur c'harv bet lakaet aze gant ar mêsaer evit noazhañ dezhañ. War e dremenvan emañ Suibhne pa ro Moling d'e vez anv Puñs ar Foll. Goude-se e sav Suibne eus e fallaenn hag e vo ambrouget gant Moling en iliz, e spered ha mont d'an neñv. Echu gant abadennoù Suibne mab Colman Cuar, roue Dál nAraidhe.

E barzhonegoù rannbennad 40 savet kerkent ha ma klev Suibne ur c'harv o vlej, ar pezh a zegas d'e spered eñvorioù mar don marteze, e oa bet sachet ma evezh gant un nebeut pedergwerzennoù diwar-benn mamm ur bagad kirvi a oa dindan evezh Suibhne, elese Fer Benn e anv gwir, a glever o kas dezhi ur bedenn. Ar pedergwerzennoù-se hag a gaver e darn ziwezhañ ar rannbennad, ne vezont meneget e studiadenn ebet, gant den. Diwar ar rannbennad a-bezh e skriv O'Keeffe : « Neuze, dont a ra ar varzhoneg hirañ, hag e meur a geñver an hini dedennusañ ; digeriñ a ra gant deskriadur gwez Iwerzhon, ha goude, kontañ a ra Suibhne e zoanioù hag e c'hloazioù. »<sup>3</sup> Met diwezhatoc'h, e anzav an ambanner: « Diaes e kavan tapout ster ar pozioù etre ar bajenn 74 ha 80; arvar ebet, un asez folklore a gaver ennañ. »<sup>4</sup> A-hend-all, peurliesañ e vez daveet d'an natur, met ivez d'ar penitiour santel, pe da emsav Ceili Dé an eizhvet kantved, anezho pellvanourien gristen ar mare troet gant an askez hag an natur, c'hoazh zoken d'ar chamaniezh<sup>5</sup>. Diaes eo mont war-raok hep lenn ar gwerzennoù-se. Setu anezho :

« Ne garan ket trouz ar gornadenn  
ken splann a glevan :  
Plijusoc'h eo breog ur c'harv  
Div wezh ugent beg.

Benveg a zo evit un tenn  
A gomm da gomm :  
Pep karv diskuizh  
War blein ar begoù.

Evit ma c'hirvi da vezañ kalz  
A gomm da gomm,  
Ne vez ket alies dorn un arer  
O prenañ en dro d'o c'hernioù. (?)

2 «Maouez kozh» evit treiñ ar saozneg 'hag', un anv a veze roet d'ar vadosenn c'hreun ziwezhañ, pe ivez 'Cailleach'. (Sharon Paice MacLEOD, Celtic myth and religion, Jefferson NC, London, 2012, p. 172). Un dudenn hag a vefe kevrenn eus bed ar c'hounidegezh a orin Neolitik enta.

3 James George O'KEEFFE, Buile Suibhne, Dublin, 1913/1996, « Then follows the longest and, in many respects, the most interesting poem in the story ; it opens with a description of the trees of Ireland, after which Suibhne recounts his own sorrows and sufferings » p. xi

4 *Ibid.*, « I find it difficult to grasp the significance of the stanzas between p. 74 and p. 80; no doubt some curious folklore is embedded in them. », p. 169

5 Feargal Ó BÉARRA, Buile Shuibhne: *vox insaniae* from Medieval Ireland, (pajennadur ebet).

Karv Sliabh Eibhlinne uhel,  
Karv Sliabh Fuaid spis,  
Karv Ealla, Karv Orrery,  
Karv feuls Loch Lein.

Karv Seimhne, karv Larne,  
Karv Line e vlevadoù,  
Karv Cuailnge, karv Conachail,  
Karv Bairenn e zaou veg.

A mamm ar bagad-se,  
Da vlevad zo deuet louet,  
N'eus karv war da lerc'h  
Hep banheziou o daou ugentad beg.

Brasoc'h evit danvez ur c'habellig  
Eus da benn zo deuet louet;  
Da bikoù war bep pikern  
Pikernioù war bep pik

Te karv o tont en ur vreogal  
Betek ennon dre ar gomm,  
Plijus eo al lec'h koazez  
war blein begoù da vanhez

Me zo Suibhne, soulbeder kaez,  
Karzhañ prim a ran dre ar gomm;  
N'eo ket ma anv diouzh al lezenn,  
Kentoc'h eo Fer Benn.<sup>6</sup>

---

<sup>6</sup> James George O'KEEFFE, *Op. Cit.*,


« I love not the horn-blowing  
so boldly I hear :  
sweeter to me the belling of a stag  
of twice twenty peaks. / *Benn* (pik)

There is the material of a plough-team  
from glen to glen :  
each stag at rest  
on the summit of the peaks. / *na mbenn* (kern)

Though many are my stags  
from glen to glen,  
not often is a ploughman's hand  
closing round their horns. ( ?)

The stag of lofty Sliabh Eibhlinne,  
the stag of sharp Sliabh Fuaid,  
the stag of Ealla, the stag of Orrery,  
the fierce stag of Loch Lein.

The stag of Seimhne, Larne's stag,  
The stag of Line of the mantles,



*Skeudenn 1: Glen Coe en Écosse.*

*Gil Calvacanti - Travail personnel -*

*Glencoe Valley, near the village of Glencoe, Lochaber, Highlands, Scotland*

---

<https://fr.wikipedia.org/wiki/Glen>

The stag of Cuailnge, the stag of Conachail,  
The stag of bairenn of two peaks. p.

« O mother of this herd,  
thy coat has become grey,  
there is no stag after thee  
without two score antler-points. (p. 79)

Greater than the material for a little cloak  
thy head has turned grey ;  
if I were on each little point,  
there would be a pointlet on every point.

Thou stag that comest lowing  
to me across the glen,  
pleasant is the place for seats  
on the top of thy antler-points.

I am Suibhne, a poor suppliant,  
swiftly do I race across the glen ;  
that is not my lawful name,  
rather is it Fer benn.<sup>1</sup> » (p. 81)

<sup>1</sup> *i.e.* man of the peaks [= Den ar Pennoù]

Ar pezh a vez skoet spered al lenner gantañ eo n'eus darempred ebet etre ar pozioù-hont hag an diverrañ omp o paouez lenn: Suibhne zo anvet Fer Benn, neblec'h all en tengeran koulz lavaret e vez graet anv eus kirvi - e derou an emgann pa vez keñveriet an daou lu o sevel o youc'h brezel ouzh ur bagad kirvi, hag en dibenn ivez evel omp o paouez lenn - mont a ra Suibhne war banhezioù e girvi a glud war blein pe pikernioù ar menez, ur vamm o deus ar c'hirvi, darn anezho a zo da Fer Benn: « evit kalz anezho da vezañ ma c'hirvi », hag ivez, aozet mat eo ar rannbennad o kregiñ hag o echuiñ gant an hevelep gwerzennoù koulz lavarout:

« A karv bihan, te hini bihan o vegeliat  
A youc'her bihan heson, [...]»<sup>7</sup>

N'eo ket ur rambre nag ur fazi. Un dra gempenn eo ne vez ket meneget alies. En e bennad kaer eus 2014 diwar-benn Buile Shuibhne, e skriv Feargal Ó Béarra :

« An dienez hag an anken eus liv penedus an destenn a zo kempouezet, ma n'eo ket graet evitañ penn-da-benn, gant stambourc'h kened an natur, a deu da vezañ un digarez disammañ da Suibhne, ha ma vez kavet deskrevet ken bevant e darn (pas en holl anezho avat) ar barzhonegoù, dreist holl ar pemp pedergwerzenn ha tri ugent A bhennáin, a bhúiredháin (§ 40) hag an unnek pedergwerzenn Fuar anocht Benna Boirche (§ 58) ». <sup>8</sup>

Ne gav ket din ez eo a-walc'h stambourc'h kened an natur evit rentañ kont eus Fer Benn da skouer, anv gwir Suibhne, nag eus mamm ur bagad kirvi a gas Fer Benn ur bedenn dezhi, nag eus kirvi ivez pa ne oa bet graet anv ebet eus al loen-se a-gent ar rannbennad 40. En e zigoradur e skriv O'Keeffe e oa tu ober hep an arroudennoù kristen hep gweañ an destenn a-zevri.<sup>9</sup> Gwir eo emañ an tengeran lec'hiet en ur prantad dezskiñ ma kemer he c'hreñv ar relijion nevez war an hengoun kozh, a vije tu da lavarout en ur heuliañ tonkadur Suibhne paneveken, anezhañ ur roue pagan a deu Ronan Finn da vevennañ un Iliz war e zouaroù. Fer benn, anv reizh Suibhne, a vije anezhañ personeladur an hengoun kozh o kemer e lusk e spered ar roue pa glev buselladenn ur c'harv end-eeün, pa ouzer e veze ar roue hanterour gant ar bed all evit e veuriad en Iwerzhon ? Kement-se zo distag a-walc'h diouzh istor fentus ur roue a goll e spered e derou un emgann ha tec'hout kuit evel ul labourer er c'hoadoù.

Penaos 'ta eo deuet ma menozioù da vezañ sturiet war-du un displegadur bennak eus ar rannbennad kevrinus-se pa ne oa hini ebet a-hend-all ?

An eil darn eus ma labour a zo bet dindan levezon Esther Jacobson he deus ma lakaet da zaremprediñ « ar c'harv gant banhezioù o fennoù evn », a zo talbenn unan eus he fennoù-skrid. Hounnezh a gomz eus ar Skuthed a veze en o c'herz ar skeudenn varzhoniel-se e dibenn o sevenadur avat, a-gent bout aloubet gant ar c'hresianed tro an trivet kantved K.K., ha mont diwar-wel neuze er C'haokaz. Kontañ a ra deomp penaos eo deuet betek eno ar Skuthed-Siberian katreerien a-bell-vro, adal sevenadur Andronovo, kement ha ma 'z eus daou rummad Skuthed: a re zo chomet er gêr e Sibiria, hag a re all «Roueel» hervez Herodot, aet tro ar Mor du. Peadra d'en em c'houlenn peseurt

<sup>7</sup> O'KEEFFE, *Op. cit.*, «A bhennáin, a bhúiredháin, a bhéiceadháin bintt,...», p. 62

<sup>8</sup> Feargal Ó Béarra, *op. cit.* «The misery and anguish of the penitential hue of the text is balanced, if not completely offset, by an emphasis on the beauty of nature, which becomes a source of solace for Suibhne, and which we find so vividly described in some (but let it be noted, not all) of the poems, especially the sixty-five quatrain A bhennáin, a bhúiredháin (§ 40) and the eleven-quatrain Fuar anocht Benna Boirche (§ 58)». Pajennadur ebet. <http://www.degruyter.com/view/product/428487>

<sup>9</sup> O'KEEFFE, *Op. cit.*, p. xxxiv

ere a c'hellfe bezañ etre bagad kirvi Fer Benn hag « ar c'harv gant banhezioù o fennoù evn ». Evit dont a-benn da gaout ur sell ledan war ar rak-hanez Indez-Europek, ez eus ezhomm staliañ al leurenn en ur zistreiñ war ar prantad amzer-hont a zo ken pouezus evit meizañ amzer tremen ar Gelted da zont.

Abaoc'h ar mare-se e oa deuet splann em spered ne oa mui an Den Gouez ma danvez studi kentañ hogen ar c'harv, al loen mager azeulet, a dalvez evit hemolc'herien a-gozh, kentoc'h eget azeul al loen a zo bet anezhañ e gwir gant an Hittited da skouer, met penaos komz evit ar poblou all ? Katia Maia-Bessa da skouer a zispleg: « E gwir, sellet e veze ar c'harveg evel gourvamm varzhoniell ar Gelted hag ar C'hermaned, dre ma 'z eo unan eus arouezioù anavezetañ ar frouezhusted, evel loenkañv hag ambrouger ar re varv. Hemolc'h gwellañ ar roueed hag an harozed e oa; »<sup>10</sup>

### Divroadur Afanasievo, Yamna

Berr-ha-berr, ma esever skeudennoù kirvi Europa Gozh (Neolitik) treset war bri-poazh, ez omp deuet a-benn da wiriañ e tiskouez skeudennoù kirvi nevez en Europa adalek sevenadur kourganiz Maikop-Novosvobodnaya (3.850/3.350-2.550 K.K.) er C'haokaz. An diskoulm poellek nemetañ hon eus kavet a-zivout orin ar skeudennoù-se eo hini divroadeg Repin-Afanasio (3.700/3.500 – 2.400 K.K.) o eren an daou ved Europek hag Aziiek adal Repin war ar ster Don betek Afanasievo er Menez Altay. Empleget e vo en divroadeg Mongoloïded mesk-ha-mesk gant Europoïded ha monedonea etre an daou ved e-pad kantvedoù:

« Ar strolladoù europat a aneze stepennoù an Altai ha Minousinsk Kray, padal e talc'he ar c'hoadegi da vezañ annezet penn-da-benn gant ar genel vMongoloïdek. Ar vevenn etrezo ne oa ket padus tamm ebet. Adal stepennoù an Altay-Sayan, e hañval ar strolladoù europat bezañ fiñvet pell a-walc'h war-du ar reter; poblañs neolitik an taiga e kornog al lenn Baikal dreist-holl, a ziskouez ur meskaj europat nevez; an elfennoù mongoloïdek d'o zro o doa tregerzhed ar gorread stepennoù ». <sup>11</sup>

Dleout a rafe an darvoud-se bezañ penn abeg d'hon azeul karv diwezhatoc'h en Europa, da gregiñ gant an Hittited, tro 2.300 K.K.

Ar yezhoù Kent-Indez-Europeg abred a grogas etre 4.000 ha 3.500 K.K. e tolead an Don, ar Volga, hag an Oural.<sup>12</sup> Dremmwel Yamna, hag a badas eus 3.300 betek 2.500 K.K. a zo eztaol danvezel astenn ar c'hKent-Indez-Europeg dre ar stepennoù Pontek-Kaspian, ha diwezhatoc'h, goude un toullad kantvedoù ehan tro 3.100 ha 3.000, betek traonienn an Danub ha sterva ar c'hKarpas. Dremmwel Yamna a badas betek ma yelo diwar glev ar rannyezhoù Kent-Indez-Europeg. An darvoud-se a c'hell bezañ goret yezhoù Indez-Europek ar c'hornog, rak-italiek ha rak-keltiek en o zouez. Da heul kement-se e kejas tud Yamna diwezhañ gant re ar Priaj Kordennet e gwalarn

10 MAIA-BESSA, Katia. *Recherches sur les différents aspects du syncrétisme religieux dans la Lusitanie romaine*. Thèse sous la dir. de Jean-Pierre Martin. [S.l.] : [s.n.], 1999: « De fait, le cerf était considéré comme l'ancestrale mythique des Celtes et Germains, car il est l'un des symboles les plus connus de la fécondité, comme l'animal funéraire et le guide des morts. C'était la chasse préférée des rois et des héros; » p. 111-112

11 M.G. LEVIN and L.P. POTAPOV. *Narody Sibiri*; Moscow, 1956 = *The Peoples of Siberia*. ; Chicago and London, 1964. « The Europoid groups occupied the steppes of the Altai and Minusinskiy Kray, while the forest belt both in eastern and western Siberia continued to be extensively inhabited by Mongoloid types. The boundary between them was by no means permanent. From the Altai-Sayan steppes the Europeoid groups seem to have moved fairly far east; the neolithic population of the taiga west of Lake Baikal, in particular, shows a Europeoid admixture. In their turn, the Mongoloid elements penetrated into the steppe regions », p. 99

12 David W. ANTHONY, *The horse, the wheel and language*, Princeton and Oxford, 2007, p. 306

Ukraina, a savas diouto ar yezhoù Indez-Europek: Germaneg, Slavek, ha Baltek. Erziwezh, e dibenn kreiz an aremvezh 2.200-2.000 K.K. E ledas un divroadeg adalek sevenadur Yamna/Poltavka betek tolead ar Volga-Oural war du ar reter ha sevel sevenadur Sintashta a zo hep mar hen kumuniezh ar yezhoù Indez-Iranek.<sup>13</sup>




Figure 14.1 Yamnaya migrations into the Danube valley and the east Carpathian piedmont, 3100–2600 BCE. The older western IE branches probably evolved from dialects scattered by these migrations.

Skeudenn 2: David W. ANTHONY, *The horse, the wheel and language*, Princeton, N.J., 2007, p. 345

13 *Ibid.*, p. 306



Sevenadur an Indez-Iraniz etre 2.100 ha 1.800 o tont eus Sintashta a verko dibenn unander ar bed Indez-Europeg. E gwirionez e ranker mont betek sevenadur Andronovo, evit poellañ ar genderviezh a zo etrezañ hag hini Srubnaya pe ar Bezioù-Prenn, an daou sevenadur ha diflukañ etre 1900 ha 1800. Srubnaya a oa e kornog an Oural betek an Dnieper. Andronovo a oa e reter an Oural betek an Altai hag an Tien Shan e Kreiz Azia.<sup>14</sup> An eil hini a gomze Indez-Europek padal e komze Indez-Iraneg an hini kentañ.

### Skuthed

Gwelet hon eus eo arouezelezh ar c'harv gant banhezioù o fennoù evn anavezet gant Skuthed aodoù ar Mor Du er pevarvet kantved K.K., o tont eus Pazirik er menez Altai e Sibiria, adalek ar 6vet kantved K.K. war a hañval. Ar Skuthed a ziskenn diouzh kantroerien kreisteiz Sibiria a deu war wel e derou ar milved kentañ K.K., o tont eus Andronovo e kreiz an eil milved K.K., e oadvezh an arem. Un arouezelezh damheñvel a gaver e tenergan Buile Suibhne e kement ha ma kresk pluñv da Suibhne hag a ya en e goazez war benn begoù banhezioù kirvi. Hervez doare ne c'hell ket an eil skeudenn diskenn diouzh eben war an ahel kempred, dre ma n'eus netra a aotre ac'hanomp da reiñ da wir kement-se. Kendarvezout a ra, hogen penaos anadiñ n'eo ket dre zegouezh hepken ? Un diskoulm poellek a vefe hini ahel dispred Sintashta a roio buhez da Srubnaya eus un tu ha da Andronovo eus an tu all. An daou sevenadur o c'horiñ an hevelep skeudennoù marzhoniell en o c'hreiz, un dra hag a c'heller goulakaat hepmuiken. Anadennoù arkeologel evel-just a zo c'hoantaet da heul evit paveziñ an hent etre Sintashta, Srubnaya, Europa hag Iwerzhon. An hent etrezek Andronovo a zo diellet<sup>15</sup> hag a chom a sav evel hon eus lavaret, gant Skuthed ar Mor Du, hag o ziskennidi.

Tem an den a ya da foll e derou un emgann, lesanvet *gelt*, hag a vev evel un den gouez er c'hoadoù n'eo ket dreist ordinal. Un hengoun iwerzhonat a zo zoken. Lavaret e vez e kresk pluñv dezhañ e-giz pa vije un evn, met n'eo ket gouest da nijal evel Suibne evelato. Brizherezh e c'hell bezañ tra ken, met ivez gervel da goun un tem marzhoniell, evel an hini skeudennaouet gant ar Skuthed e Pazirik hag e lec'h all, gant an iskis ez eo. Bezet a vezo er rannbennad 40 eo gouest Suibne, elese Fer Benn da nijal evel un evn:

« A karv bihan, A hini bihan garek  
Gouest on bet d'az tapout,  
d'az kaoliatañ  
eus an eil pikern d'egile.»<sup>16</sup>


« Balc'h turzhunell ar c'hoadoù  
pa sav evidomp,  
he adaptout a ran prim  
pan eo kresket ma fluñv.»<sup>17</sup>

14 *Ibid.*, p. 435

15 Mikhail P. GRYAZNOV. *The ancient civilization of Southern Siberia*, New York, N.Y., 1969, p. 67/97, skd. 26, 56, 57, 58

16 A ellteóg, a luirgnechóg,  
fuarus-[s]a do *ghreim*,  
misi ort ag marcaighecht  
as gach beinn a mbeinn.» p. 68, 69

17 O'KEEFFE, *Op. Cit.*



*Skeudenn 3: Horse headdress from Pazyryk Cairn n°1. After Gryaznov, 1950 (Esther JACOBSON, The stag with bird-headed antler tines, Pl. 4 in The Museum of Far Eastern Antiquities, n° 56. Östasiatiska Museet: Stockholm, 1984.*

Gwelet hon eus ne oa ket gouest ar *Gelt* da nijal en hengoun pobl. Met aze, er rannbennad 40 daoust hag eñ n'eo ket deuet Suibhne da vezañ Fer Benn, hag hennezh eo a vefe deuet gouest da nijal gant e spered a lavarfen? «Mantell ar varzhed pe gwelourien Iwerzhon, graet dre vras gant pluñv evned, a gouna gwiskamant ar Siberianiz, a zo peurliesañ o aroueziañ un evned bennak, pe rouesoc'h, ul loen.»<sup>18</sup> Aze marteze e kavomp an anadenn arkeologel a rae diouer deomp evit paveziñ an hent etre Evenked Sibiria hag ar Gelted?

### Hittited

An temoù-se hon eus galvet da goun endeo en ur pennad all, setu n'eus ezhomm ebet endounañ ar studi amañ. E skourr ar c'hornog e welomp arouezelezh ar c'harv o'n em silañ e-touez komzerien an Indez-Europeg. Hervez hon braslun e krog an traoù gant an Hittited a zifoup en Anatolia ken abred

---

«Fer[a]n eidhinn iomuallach  
an tan eirghius duinn,  
goirid bhim da ttarachtain  
o rofas mo chluimh». P. 74, 4

18 N. Kershaw CHADWICK, *Poetry & prophecy*, Cambridge, 1952, *The cloak of the Irish poets and seers, largely composed of birds' feathers, recalls the costumes of the Siberian, which are most commonly in the representation of some bird or, less commonly, some animal.*” p. 58. Anv vez graet eus “cloak of crimson bird feathers = kabell pluñv evned ruz-moug”.

ha 2.300 K.K., ha degas ganto o azeul karv, a ziskuilh c'hoazh evel ma vo gwelet diwezhatoc'h, ur gevredigezh vammdroet. Gant ar ger «dia» evit «doue» a ziskouezo adalek 2.500 K.K. a-berzh ar Gourganiz anezho mesaerien loened hag a dalvez ivez evit an «deiz», e teu war wel war-un-dro al loen a ya gantañ, an tarv, a vo ivez doue an arnev a struj an douar. Da va soñj ne vo mui dazont ebet ken war hir dermen d'an nebeutañ evit al loen mamm adalek ar mare-se, nemet e-mesk ar bobl e vefe, da lavaret eo an niver brasañ eus an dud. Da wiriañ.

Evit krennañ, kavet hon eus div roudenn d'an azeul karv en Europa: hini ar Skuthed diouzh sevenadur Andronovo a vo aet da netra er pevarvet kantved K.K., hag hini an Indez-Europiz diouzh sevenadur ar Beziou-Prenn pe Srubnaya. Da neuze n'eus ken heuliañ ar skourroù meuriadel-se o vont kuit an eil re goude ar re all evit anavezout hon azeul karv diouzh ar roudoù en do lezet war e lerc'h : Usatovo (Krimia), Skandinavia, Val Camonica, Iberia, Gallia, Breizh Veur, Iwerzhon. Setu an doare hervezomp hep mont da glask an traoù dre ar munud amañ.

### Evenked

Bremañ e c'heller studial an Evenked en ur c'houzout perak, peogwir e kaver en o zouez ar skeudenn varzhoniell dostañ ouzh ar re hon eus digenvezet abretoc'h e rannbennad 40 Buile Suibhne:

« An dud-se bet anavezet a-gent evel Toungoused a vez o vevañ en taiga eus ar ster Ob'-Irtyssh er c'hornog, hag ar mor an Okhotsk ha Sakalin er reter, ar ster Toungouska Uhel (Angara), al Lenn Baikal hag ar ster Amour er c'hreisteiz. O c'henel a zo hini ar strollad Baikal pe Hen-Sibirian, tost a-walc'h ouzh ar Vongoliz. En hanternoz e komzont yezhoù Toungouz ha Mandchou. Hemolc'herien int, ha mesaerien kirvi-erc'h en tolead ramzel a ya eus ar Yenisei d'ar mor Okhotsk. Hemolc'hiñ a reont marc'heged da gentañ evit o c'hig hag o feur. Pesketerien int ivez, ha mesaerien kezeg ha chatal er c'hreisteiz. « Deur hanezel a zo gant ar relijion Evenk dre ma talc'h stummoù kredenn a-c'hiz kozh hag abred kenañ. [...]. E-touez ar menozioù henañ ez eus speredeladur holl anadennoù an natur, personaat anezho, kredenn en ur bed uhel hag izel, kredenn en ene (omi) hag un nebeut meizadoù totemek. Bez e oa ivez lidoù hud a bep seurt kevredet gant hemolc'hiñ hag evezhiañ bagadoù. Diwezhatoc'h e voe renet al lidoù-se gant chamaned.»<sup>19</sup>

---

19 G.M.VASILEVICH and A.V. SMOLYAK, The Evenks, in M.G. LEVIN and L.P. POTAPOV. *Op. Cit.* « These people formerly known as Tungus, are living in the Taiga from the river Ob'-Irtys in the west, the Okhotsk seacoast and Sakhalin in the east, the river Upper Tunguska (Angara), Lake Baikal and the river Amur in the south. Ethnically they belong to the Baikal group or Paleo-Sibirian, close enough to the Mongols. In the North they speak Tunguso-Manchourian languages. They are hunters, and reindeer breeders in the enormous territory from the Yenisei to the Okhotsk Sea. They hunt equidae first of all for meat and fur. They are also fishers, and horse and cattle breeders in the south. "The Evenk religion is of historical interest since it retains some extremely early archaic forms of belief. [...]. Among the most ancient ideas are spiritualization of all natural phenomena, personification of them, belief in an upper and lower world, belief in the soul (omi) and certain totemistic concepts. [...]. Later on these rituals were conducted by the shamans », p. 620, 647

Ar anv-se a zo dezho hag a vez roet d'o «gwelour»<sup>20</sup> .

Bremañ e c'hellomp komz eus kalon an enklask: hor studiadenn a zo diazezet war an div skeudenn a zegas koun an eil hini eus eben, da lavaret eo Suibhne a ra war-dro ur bagad kirvi perc'hennet gant ur vamm, a gas dezhi ur bedenn: « *A mathair na groidhi-si* ». Un tammig disheñvel emañ an traoù gant an Evenked:

« Ur gwaz he deus Mestrez an douar – mesaer dizanv he bagad an hini eo. A-gevret gant skoazellerien, mesaerien dizanv heñvel, e ra war-dro greadoù diniver a bep seurt loened a zo e dorn mestrez an douar. E lec'h er familh a zo e dalc'h ar vestrez, ha ne gav ket d'an dud eo ezhomm ober dave dezhañ evit kas al lidoù liesdoare da benn.<sup>21</sup>

Ni ha laka an daou zoare keñver : eus an tu « gwaz dizanv mestrez ar bed a ra war-dro he bagad » hag eus an tu all « Fer Benn suward bagad ar vamm anezhañ ». Fer Benn a zo ivez, evel mesaer Mestrez an douar, suward ur gread kirvi met un anv a zo dezhañ. An diforc'h bras gant ar pleg e Sibiria eo Mamm ar bagad kirvi aet da vMestrez. Ar c'hemm-se a ziskouez marteze war beseurt tu e tro emdroadur ar meuriad. Perzh brasañ ar sevenadur hengounel eo ar vammelezh gant levezon uhel ar vamm er familh, er c'hlan, hag er meuriad e-pad ur mare d'an nebeutañ, rak tamm ha tamm goude pa vo bet tizhet a live-se, e ranko ar merc'hed plegañ mui pe vui ouzh pouez an tadoù er gevredigezh a venn kemer ar galloud speredel ivez. Bezañs ar vamm a vezo klevet atav, met rankout a raio ar chaman da gentañ mont e darempred gant ar Vestrez kent gallout tizhout ar Vamm. Ha dre ma vez graet anv eus ar ger 'chaman' e ouzomp ne c'hell ket ar prantad lid-se bezañ gwall goshoc'h eget ar milved kentañ eus Hon Amzer, rak abadenn chamaniezh ebet zo bet testeniet e gwir a-gentoc'h<sup>22</sup>: « Un doare chamaniezh bennak a hañval bezañ diwanet e Kreiz Azia tro hanter ar milved kentañ G.K. ».<sup>23</sup>

Un ardamez eo ar chamaniezh eus stad kevredigezhel an Evenked o korntroiañ war-du an tadvignezelezh. En abeg d'an dra-se end-eeün en deus poan ar chaman d'am ali da gejañ dre ar spered gant ar Vamm Kentañ pe elese an hen mamm-loen marzhoniel, dezhi stumm ur garvez-meur pe un heizez. Ar pezh a ro din da grediñ e tlefe bezañ stumm un heizez ivez gant *mathair na groidhi-si*, rak mamm eo hi, ha loen. Kement-se evit lavarout ez eo kozh a-walc'h stad Mamm ar bagad deskrivet e Buile Suibhne, en ur c'houzout mard eo gwir a lavaromp, e tlefe bezañ skeudenn an traoù ken kozh evel etre derou ha dibenn divroadur Repin da lavaret eo adalek 3.700 betek 2.400 K.K., evel hon eus gwelet uheloc'h.

Evit en em gavout e-touez dafar marzhoniel an Evenked hon eus kavet ur frazenn a grenn peurvad hol lavar adalek Mamm Hollvedel al loened hag an dud betek amzer dostoc'h ouzhomp ar

---

20 « seer(ess) » e saozneg. «Voyant» ou «visionnaire» e galleg?

21 A. F. ANISIMOV, *Op. cit.*, cosmological concepts of the people of the North, in *Studies in Siberian shamanism*, Toronto, 1963. « The mistress of the earth has a husband—the nameless shepherd of her herd. Together with assistants, likewise nameless shepherds, he tends countless droves of all sorts of animals which the mistress of the earth has at her disposal. In the family he occupies a position dependent in every way on the mistress, and people do not consider it necessary to refer to him in the performance of the various rites.», p. 176

22 Gilles BOUCHERIT, *L'esprit-mère dans Buile Suibhne: romance en moyen-irlandais du XIIe siècle*, Rennes, 2009. «Ar prantad koshañ anavezet eus degouezh ar ger en deus roet an toungouseg chaman eo an tokarianeg *samāne*, a c'hellfe bezañ deiziataet tro 200 K.K hervez [J.P. Mallory, *In search of the Indo-Europeans*, 1989, p. 59].», p. 172

23 Esther JACOBSON. *The deer goddess of ancient Siberia*, Leiden, New York, Köln, 1993. «Some kind of shamanism seems to have emerged within Central Asia by the middle of the first millenium A.D.» p. 206

chamaned:

« Adframmadur hengounioù marzhel an Evenked kaset da benn gant Anisimov ha Vasilevich, e-touez re all, a ziskouez an doare ma verrzastum an hengounioù chamanel diorroadur hanezel reizhadoù krediñ a zo e kreiz buhez ur spesad tud. Empleget e-barzh an hengounioù chamanel-se e kaver ar gwiskadoù henaekañ – gwiskadoù a ra dave en-dro d'ar vamm loen, da dreusfurmidigezh ar vammenn orin dotemek-hont en ur stumm hanter-den, hag hanter-loen, da dilignezhadur ar vammenn dotemel-se en un dra azeulet, hag en diwezh, da isurzhiadur arveziou kreiz an hen kredennoù d'an azeul chamanel, da lavaret eo, da galloud ha kargoù ar chaman. »<sup>24</sup>

An adframmadur hengounioù-se hon darbar gant un asez skeul amzerañ a c'hell bezañ graet gantañ a-benn keñveriañ steudad hengounioù marzhoniezh an Evenked a zo e penn all ar chadenn amzer ha douar a zo etrezomp, hag ur prantad kozh eus hon marzhoniezh keltiek. Pouezus eo gallout imbroudiñ an dachenn-studi-mañ kent marteze deiz bennak disorc'hiñ.

### Gobedoù-kloc'h, Finn

Ne oa ket bet anadet betek-hen ar c'hrafoù boutin a hañval bezañ etre Mamm ar bagad e Buile Suibhne, ha Finn. Ar gwiskadoù marzhoniell henañ a ra dave d'ur vamm loen ha da treuzneuziadur an andon dodemek - a vez lec'hiet war dachenn ar c'hlan pe ar meuriad en ur greizenn dotemek, ur wezenn alies – en ur stumm hanter-den, hanter-loen. Ar vamm eln ramzel pe heizez a zo andon vammell an holl loened hag an tud.<sup>25</sup>

E-keit-se e c'hellomp evezhiañ e tlefe pleg Fer Benn bezañ koshoc'h eget hini Finn, dre m'emañ oc'h ober war-dro loened ur vamm, padal eo Finn gwaz ur spered den ha loen a c'hellfe bezañ hini treusneuziadur ar Vamm Veur orin meneget a-gentoc'h. An dra-se a dalvez e vefe enta live amzer varzhoniell Fer Benn koshoc'h eget hini Finn. Dont a ra brav an evezhiadenn-mañ dre m'eo pouezusoc'h Finn evel gour eget Fer Benn. Evel omp o paouez lavarout e vev Finn en ur bed hemolc'herien pe kadourien ma 'z eus muioc'h a bouez gant ar baotred eget e hini Fer Benn ar suward, met ma vez bras bras hini ar merc'hed c'hoazh e spered an dud. Ur bed dre gomz rakkristen seder, a vo lakaet neoazh da gejañ dre skrid gant hini Padraig<sup>26</sup> e « Acallam na Senórach = The Colloquy with the Ancient Men », eus an daouzekvet kantved G.K.<sup>27</sup>

Gallout a reer en em c'houlenn ha gwir eo e c'helle an dud derc'hel koun eus eñvorioù ken kozh ha re Finn, ur bed hemolc'herien hep kezeg na tirvi evit doare: «Bez' e veze gant ar strolladoù meulet-mañ da heul, un hengoun hir a zeskadurezh « pagan »<sup>28</sup> henvroad : *áes dáno*, ar «re zesket» -

24 *Ibid.*, «The reconstruction of Evenk mythic traditions carried out by Anisimov and Vasilevich, among others, indicates the manner in which shamanic traditions recapitulate the historical development of belief systems central to the life of a specific people. Enfolded within these shamanic traditions are the most archaic layers—layers which refer back to an animal mother, to the transformation of that originating totemic source into a form half-human and half-animal, to the degeneration of that totemic source into a cult object, and, finally, to the subordination of fundamental aspects of archaic beliefs to the shamanic cult, that is, to the shaman's power and functions.» p. 192

25 *Ibid.*, « Enfolded within these shamanic traditions are the most archaic layers—layers which refer back to an animal mother, to the transformation of that originating totemic source into a form half-human and half-animal, at the place of the giant cow elk or doe, the maternal source of all animals and people. », p. 192

26 St Patraic or Pátraic

27 W.H. Stokes, E. Windisch, *Irishe texte*, Leipzig, 1900.

28 Ur ger kristen eo a dalvez kement ha «broad».

«kalvezourien» e brezhoneg marteze - ar re bouezusañ anezho o vezañ ar varzhed (*filid*)<sup>29</sup> ha gwiraourien (*brithemin*)». <sup>30</sup> An dra-se zo gwir eus « Iwerzhoniz ar grennamzer, met ivez eus o amezeien geltiek hag eus tud all nes dezho dre Eurazia ». <sup>31</sup> Arabad disoñjal dremm diazez ar sevenadur keltiek: «Alc'hwez ar sevenadur keltiek eo an Drouized evel enframmadur hollgeltiek.»<sup>32</sup> Lavaret e vez en doa Colum Cille kemeret perzh e bodadenn Druim Cett en amboaz mont a-du gant ar *file* a felle da Aed, son of Ainmire († 598) pennden ar re Uí Néill lakaat en arvar. An emglev a oa bet kavet gant an tu all eus Aedán mac Gabráin, roue Dál Riata e Skos († c. 608) a vire ouzh an eil kamp da dagañ egile, pezh a c'hoarvezo koulskoude gant o diskennidi Domnall son of Aodh (Aed), ha Domnall Brecc, e Emgann Mag Rath ma kollas Suibhne ar roue pagan e skiant vad, evel omp o paouez lenn.

Greomp ul lamm war-gil bremañ: a-gent d'an Neolitik ha da brantad ar Meurvein echuiñ, war-dro 2.000 K.K., en em gaver abred gant tud o Gobedoù-kloc'h, gant o Listri-boued goude, ha pelloc'h c'hoazh marteze gant o c'haoterioù arem war-dro 1.200 pe 1.000 K.K.

« Case a zo ali e oa kreiz an hollad gobedoù kloc'h-se – gwareg ha biroù, kontell, ha gobed - un hollad hemolc'hiñ arouezel, o pourveziñ da hemolc'h ar ouezeri vras, embreget e bed ar re vev pe ar re varv, lid-lazhañ anezhi, ha lid-evañ he gwad (Case 1998; 2004a, 29; 2004b; 2007, 149-50)<sup>33</sup>».

Ar souezhusañ goude lennet ar pennad-hont, eo mont en arbenn d'ar pennad all-mañ da heul, ma adkaver war-bouez nebeut an hevelep dafar hemolc'hiñ, n'eo ket gant ar gobedoù-kloc'h ken met gant Finn hag e dud. Un azeul karv, pe ur bed marzhoniell ma vez pouez bras gant al loen-se, n'eo ket dianav e kelc'h Finn pe Leinster, dre ma kaver ennañ diskar lidel ur c'harv, pa “zesk ur roue, unan eus beverien gozh ar Fianna, Fionnchadh, penaos ober berzh en ur hemolc'hiñ” (*sén sealga / conách sealga*):

«Ar roue a vez lavaret dezhañ mont da hemolc'hiñ d'ar merc'her a zeu. Ar c'harv kentañ a lazh a zo da vezañ diempret ha roet d'e heul ha d'e chase. Daouarn ha klavioù an heul a zo da vezañ mastaret gant gwad ar c'harv ha dent ar chase zo da vezañ mastaret gant gwad. Ober a reas evel desket dezhañ ha berzh a reas en ur hemolc'hiñ.»<sup>34</sup>

E-giz pa vije bet ankounac'haet ar Garvez-Meur d'ar mare-se, e veze aberzhet memestra al loen kentañ. N'eo ket meneget er pennad, gwir eo, met aberzhet e vije al loen kentañ da biv a-hend-all ma ne vije ket dezhi evit he zrugarekaat, rak pourveziñ an dud a ra gant he loened, evel ur vamm a vouet he bugale ? E-giz pa vije adkavet amañ an dud hag al loened eo mamm al loen meur dezho e

29 Michael J. ENRIGHT. *Lady with a mead cup*, Dublin, Potland OR, 1996, 2013. Pe barzhed-welour, p. 157

30 *Ibid.*, : «Each of these honoured groups had a long gradition of native pagan learning : *áes dáno*, the «learned men» or «men of art», of whom the most important were the poets (*filid*) and jurists (*brithemin*)» p. 158

31 *Ibid.*, p. 156

32 Michael J. ENRIGHT, *Op. Cit.* «Their society was a pan-Celtic institution», p. 157

33 John T. KOCH and Barry CUNLIFFE, *Celtic from the West 2*, Oxford, Oakville, 2013. «Case suggested that the core of this bell beaker Set – the bow and arrow, knife, and beaker – was a symbolic hunting set, providing for the hunting of big game, undertaken in either the world of the living or the dead, its ritual killing, and the ritual drinking of its blood (Case 1998; 2004a, 29; 2004b; 2007, 149-50).» p. 43

34 Ó BRIAIN Máirtín. Oisín's biography : conception and birth, in *Text und Zeittiefe*. Tübingen, 1994, «The king is told to go hunting on the following Wednesday. The first deer he kills is to be dismembered and given to his retinue and pack of hounds. The deer's blood is to be smeared on the hands and weapons of the retinue and blood is to be smeared on the teeth of the hounds. He did as instructed and prospered in his hunting». p. 483

bed marzhoniell an Evenked: «Gouzout e oa mamm Oisín un heizez, a oa kevrenn eus hêrezh stroll dre gomz Iwerzhon ha Skos gouezeleg».<sup>35</sup>

Arabat tremen dreist an dudenn all-mañ ivez: «An doueez Flidais a oa kevredet gant loened fonn hag ar c'hoadoù, ha lavaret e veze edo o piaouañ bagadoù kirvi gouez ha chatal.»<sup>36</sup> An diaes ganti eo emañ o chom en ur síd, da lavaret eo en un endro sevenadurel a zo tost ouzh marzhoniezh an Tuatha Dé Danann.

Arouezelezh ar pennad kentañ a vefe hini ar Gobedoù-kloc'h, hini an eil pennad a vefe hini hemolc'herien gentañ tud Fionn mac Cumhaill Iwerzhon abred. Ar gavadenn-mañ a c'hoarvez en ur stern gant ar gavadenn all : « E goulou komprenzon nevez diorroadur houarnerezh ar vegenn eus an dud, e rank an Aremvezh Atlantek bezañ enframmet e pep displegadur eus an orinoù keltiek. »<sup>37</sup>

D'ar mare-se e tegouezhomp gant diaesamant bras hon enklask abaoe m'eo bet kroget, rak betek-hen e vezemp o stekiñ dalc'hmat ouzh kevrin tudañ an Inizi Keltiek. Hep bezañ studiet donoc'h ar gudenn, eo pouezus an dafar a zo gant ar Gobedoù-kloc'h keñveriet gant hini hemolc'hiñ ar Fianna, pa ouzer e oa ar c'harv evit ar Fianna e Iwerzhon gozh, ur c'hrouadur leziek<sup>38</sup> ha kevredet gant ar bed all.

Evit a sell ouzh ar Gobedoù-Kloc'h neuze, « arguzenniñ a c'heller ober e voe kaset hollad Yamanaya gant Indez-Europegerien ha neuze, ul lavar Indez-Europeg a c'hell bezañ unan eus diazezoù kent-hollad ar Gobedoù a voe strobet en Iberia. »<sup>39</sup>

#### Cruthin, Pretani

Ma fell deomp heuliañ red an amzer hanezel bremañ, eomp war-eeün betek ar prantad etre 1500 – 900/800<sup>40</sup> ma veze birvidik ar rannyezh Spangeltieg-Galian-Predeneg-Gouezeleg. Ur rannyezh hep *p* abaoe koll ar *p* indez-europeg c'hoarvezet e-pad ar mare-se :

« Er prantad-se a startijenn deskadurel, o kendegezhout gant Amzerioù Du ar C'hres, e veze lorc'hañs gant rannyezhoù Iberiadezet an Indez-Europeg Nukleel (*d.l.e.* Kent-Keltieg), hag e strewas e berzhioù diforc'hus (o entoueziañ fatidigezh ar \*p) e rouedad an Aremvezh Atlantel ( ha marteze e takad kornog ar Beziou-Jarl, Roen-Suis-Frañs ar reter'). »<sup>41</sup>

Anavezet mat abaoe pell eo bet kollet ar -p Indez-Europeg dre fatidigezh gant an holl rannyezhoù

35 *Ibid.*, «The knowledge that Oisín's mother was a deer was part of the common oral heritage of Ireland and Gaelic Scotland», p. 460.

36 MacLEOD, *Op. cit.*, «The goddess Flidais was associated with the abundance of animals and the forest, and was said to own herds of wild deer and cattle.», p. 163.

37 John. T. KOCH, and Barry CUNLIFFE, *Op. Cit.*, «In the light of the new understanding of the élite metalwork's development, the Atlantic Bronze Age must now be integral to any explanation of Celtic origins», p. 5

38 Máirtín Ó BRIAIN (Gaillimh) *Op. cit.*, «A creature of liminality»: p. 482. Da lavaret eo pa vezer etre daou ved, ar bed-mañ hag ar bed all, e-pad ul lid (hervez damkan Arnold van Genep).

39 John. T. KOCH, and Barry CUNLIFFE, *Op. Cit.* «One could argue that the Yamnaya package was carried by Indo-European speakers and so an Indo-European language may have been one of the constituents of the beaker proto-package that was assembled in Iberia.», p. 27

40 John. T. KOCH, and Barry CUNLIFFE, *Op. Cit.*, p. 137

41 *Ibid.*, « In this period of cultural dynamism, coinciding with the Greek Dark Ages, the Iberianized dialect of cultural Nuclear Indo-European (i.e. Proto-Celtic) was prestigious, and its distinctive features (including weakening of \*p) spread within the network of the Atlantic Bronze Age ( and possibly to the western Urnfield area, 'Rhin-Suisse-France orientale') », p. 137

keltiek, hag ivez gweuzelaet \*gw- e b-. Darn anezho o deus miret ar weuz-ouelienn divouezh \*kw-. Ar re all o deus lakaet anezhi [diwezhatoc'h] da emdreiñ davet ar weuzenn /p/ (galianeg, leponteg, predeneg):<sup>42</sup> gall. *pedwar*, bret. *pevar*, irl. *cethor* (hiziv ceathair) : \**kwetwores*<sup>43</sup>. Met ne oa ket anavezet pegoulz e oa c'hoarvezet an emdroadurioù-se. An doare nevez da welout an traoù a ro prantadoù amzer d'ar c'hemmoù: e-pad an aremvezh-etre diwezhat hag an aremvezh atlantel eo fatet ar -p indez-europeg evel omp o paouez gwelout. Goude an darvoud-se eo bet torret ar rannyezh spangeltieg ha Galian-Predeneg-Gouzeleg war-dro 950/900—c. 500 KK – da lavaret eo e-pad *An tremen eus an Arem d'an Houarn*.<sup>44</sup> Sachet ar spangeltieg gant bed ar mor kreizdouarel er prantad-se, ez eas ar gorread Galianeg, Predeneg, Gouzeleg en-dro evel un unander,<sup>45</sup> met un unander hep *p*. Adkavet eo bet « ur -p deuet eus treuzfurmatur *kw*. » gant ar rannyezhoù galian-predeneg diwezhatoc'h: « Daoust ma n'eo ket ur c'hemm fonetek divoaz, e ouzomp e oa deuet ar c'hKeltieg \*kw da vezañ \*p e Predeneg ha Galianeg ket e Gouzeleg avat, d'ar mare pa glevas Pytheas eus Marsilha an distagadur \*Pritanoi 'Bretoned' tro 325 KK.<sup>46</sup> Klevet gant Pytheas er mare-se a dalvez e oa bet adkavet ar fonem nevez abretoc'h. Ya, met daoust ha tu zo bezañ resisoc'h ?

En Iwerzhon, goude mare ar c'hlezeoù Gündlingen, a zispleg deomp an arkeologourien, etre 800 ha 650, da lavaret eo e mare Hallstatt C, ez eus bet nebeut a-walc'h arouezioù a genstok gant an diavaez, ken na deuas war wel houarnerezh La Tène (dreist-holl e hanterenn hanternoz Iwerzhon) adalek ar pevarvet kantved KK.

E-pad ar prantad digenvez deskadurel, etre 650 ha 400 enta, eo bet torret an ere yezh a veze er gorread Gallianeg-Predeneg-Gouzeleg. Anadet e vez gant nevezintioù rannet gant ar galianeg hag ar predeneg hepken,<sup>47</sup> en o zouez emichañs, dont war wel ur *p* o tont eus *kw*, evel da skouer \**kwetwores* o tont da vezañ *pedwar*. An nevezenti-se a ro deomp daou anv evit tud a oa eus an hevelep rummad(-yezh) diagent. N'eo ket diezhomm kas da goun istor ar rummad tud-mañ en ur venegiñ Thomas O'Rahilly : «ar [Priteni pe Pretani] zo, evel o deus Zimmer ha lenneien all anavezet, annezidi abretañ Breizh Veur hag Iwerzhon ma c'hell un anv bezañ roet dezho da vat.»<sup>48</sup> Priteni a vez distaget Cruthin gant ar ouezelegerien, « Ir. *Cruthin*, and [...] Welsh *Prydyn*<sup>49</sup>. » Gant an doare intent nevez e gwirionez e ranker displegañ an traoù en un doare disheñvel : ar ger orin Cruthin eo, er rannyezh gouzeleg, predeneg, galianeg, a zo deuet da vezañ Priteni pe Pretani goude d'ar rannyezhoù Predeneg ha Galianeg bezañ tapet ur *p* nevez etre 650 ha 400 KK, hervez a glaskomp gwelout an traoù. E-keit-se « annezidi abretañ an Inizi Keltiek (Iwerzhon, Breizh Veur)

42 Pierre-Yves LAMBERT, *La langue gauloise*, Paris, 1997, p. 16

43 Pierre-Yves LAMBERT, *Présentation historique des langues celtiques*. Diplôme d'Etudes Celtiques, Rennes 2, p. 3

44 John. T. KOCH, and Barry CUNLIFFE, *Op. cit.* «At Stage 4 the Orientalization led to the breakup of the Atlantic sociocultural area and the first division of the Celtic into Hispano-Celtic versus Gaulish-Brittonic-Goidelic. p. 135; *The Bronze-Iron transition*, p. 137.

45 *Ibid.*, «On the other side of the schism in Celtic caused by the onset of the Orientalization, a Gaulish-Brittonic-Goidelic language area continued as a unity.» p. 138/140

46 *Ibid.*, Though not an unusual phonetic change, Celtic \**kw* had become \**p* in Brittonic and Gaulish but not Goidelic, by the time Pytheas of Massalia heard \**Pritanoi* 'Britons' about 325 BC. p. 140

47 *Ibid.*, «The Gündlingen swords 800-650 Hallstatt C are well represented in all parts of Ireland. Afterwards there is relatively little evidence for external contact until La Tène metalwork appeared (mostly in Ireland's northern half) from the 4<sup>th</sup> century BC. The cultural isolation of Ireland from Britain and Gaul at this stage can be correlated with the break up of the Gaulish-Brittonic-Goidelic language area, as reflected in a series of linguistic innovations shared by Gaulish and Brittonic, but not Goidelic (Koch 1992)» p. 138/140

48 Thomas F. O'RAHILLY, *Early Irish history and mythology*, Dublin, 1984, «[The Priteni, or Pretani] are, as Zimmer and other scholars have recognized, the earliest inhabitants of Britain and Ireland to whom a definite name can be given.» p. 15

49 *Ibid.*, p. 444



ma c'hell un anv bezañ roet dezho da vat», a oa anvet Cruthin<sup>50</sup>. Dont a raint da vezañ anvet *Pretani* diwezhatoc'h, nemet en Iwerzhon n'he deus ket rannet nevezinti kavatur ur p nevez gant an div rannyezh all. Manet eo an dud eno gant o anv orin, *Cruthin*. Da eo adlenn ar frazenn gozh er mod nevez : « Ar [c'hCruthin ] zo, evel o deus Zimmer ha lenneien all anavezet, annezidi abretañ Breizh Veur hag Iwerzhon ma c'hell un anv da vat bezañ roet dezho ».

C'hoazh, n'eo ket sur e vefe ar re gCruthin an annezidi keltiek kentañ war enezenn Iwerzhon, pa ouzer bremañ ar perzh c'hoariet gant tud anvet Ἰουερνοὶ *Iuernoï pe* gens Hiernorum e bed ar metalouriezh: «Adalek war-dro 2.400 KK, o kregiñ 'gant ul live uhel a-walc'h' (...), e voe greantet kouevr e mengleuz Ross Island, tost da gKillarney, Co. Kerry, mervent Iwerzhon.»<sup>51</sup> Hag an dud-se, da heul arguzennoù John T. Koch, a vije bet roet o anv d'an enezenn, diwezhatoc'h: « N'eo ket digenvezus en dije ar strollad a zegasas houarnerezh da Iwerzhon a-bezh, en ur gemm doare bevañ ar vro penn-da-benn ha da viken, roet e anv hag identelezh d'ar vroad».<sup>52</sup>

### Klozadur

Hep ober van, aet eo war-raok un tamm mat hor studiadenñ amzerañ donedigezh an dud war an Inizi Keltiek gant an Érainn da gentañ adalek 2.400 K.K., ar C'hruthin da heul moarvat gant o azeulioù hemolc'herien tost ouzh an natur, ar bPretani dre gemmadur e Breizh Veur, ha tud la Tène adalek ar pevarvet kantved K.K. Lezet a-gorn an Neolitiked hag ar vMesolitiked a oa gant a re mañ ivez darempredoù marzhoniell gant ar c'harveged. Met ar re-se n'int nemet priziadurioù kentañ un daolenn da sevel. Betek-hen ne oa met amzervezh ar c'hezeg hag an tirvi a oa diellet er skridoù, e koll aremvezh ar c'harv manet diziskiv.

Arabat e vefe stankañ hon daoulagad rak goulennoù a chom c'hoazh hep o eilger. Komz a ran da gentañ eus *Bugady enintyn, bugady mushun* h.a., etre mamm ha mestrez, a zo da bleustriñ c'hoazh gant an tost ma hañval bezañ n'eo ket hepken ouzh Suibne, pe Fer Benn pa lavarinn mat, met ivez ouzh Finn hag e dud. Gouzout a reomp e tiaraog marzhoniezh ar c'harv hini ar marc'h e-touez ar c'hGermaned.<sup>53</sup> Ne c'hell ket bezañ disheñvel gant ar Gelted. Da heul, hini an tarv gant Táin Bó Cualnge e Norzh Iwerzhon. Tri loen pouezus a-walc'h e buhez marzhoniell ar meuriad evit galloud bezañ totemel, da c'hortoz an amzer pa vo tu lakaat a mareadoù marzhoniell da gengejañ gant an amzer arkologel, hanezel ha lec'hel.

Anat eo din ma 'z eus traoù pouezus da besketañ e Sibiria e bed an Evenked, ar gKeted h.a., arabat ankounac'haat emañ pell a-walc'h an dud-se dre al lec'h, met ivez diouzh doare soñjal ha bevañ hon hendud evel m'eo deuet da vezañ anavezet ganeomp hiziv. Eus an tu all arabat bezañ pounnerglev ouzh boazioù an dud-se gant ar pell m'emaint diouzhimp, hag a c'hell bezañ bet tost a-walc'h ouzh hini hon hendud d'ur mare bennak zo dianav penn-da-benn deomp-ni.

---

50 *Ibid.*

51 John. T. KOCH, and Barry CUNLIFFE, *Op. cit.* «From about 2400 cal BC, beginning 'at a relatively advanced level' (...), copper was produced at the mining site of Ross Island, near Killarney, Co. Kerry, south-west Ireland.» p. 133

52 *Ibid.*: “It is not inconceivable that the group who brought metallurgy to all Ireland, changing the country's way of life completely and forever, gave their name and identity to the nation”. P. 135.

53 Marc-André WAGNER. *Le Cheval dans les croyances germaniques. Paganisme, christianisme et traditions.* Paris, 2005, p.

